

# KANTIK

DA

## SANT YANN - BADEZOUR

War don : *Ilis ma farouz*

DISKAN

*Sant Yann, tad iliz Lannuon,  
Gret ma heuilfomp a greis kalon  
Lezen Doue, vel hon zud koz,  
Wit mont eun de dar Baradoz.*

I

Mab da zaitez Elisabeth,  
Sant Yann, dre vurzud oa ganet,  
Hag e dad, herve ar vro,  
Dlee rei d'hezan eun hano.

II

Mez 'boë nao miz e dod oa mud,  
Ha zouezet braz oa e dud  
Pa skrivaz war eun dolennik :  
« Yann eo hano ma bugelik ».

III

Kalz mui zouezed e c'hoaïnt c'hoas  
P'hen klewjont o komz vel biskoaz :  
« Petra, mè, vo ar bugel-man,  
» Rag dorn Doue a zo gant-han ? »

IV

Sant Yann, pe oa bugelik c'hoas,  
A c'hez da chom en eur c'hoat braz :  
Eno tremene e vue,  
Er binijen, er baourente.

V

War dro tregont wloas e tisken  
Da brezek, war ribl ster Jourden,  
Eno e ro ar vadeiant  
Da gement hini a neuz c'hoant.

VI

Jesus d'e dro a eruas,  
Ha Yann d'an oll Hen diskouezas :  
« Sed oan Doue, zetu aman  
» N'Hini doug pec'het ar bed-man ! »

VII

Jesus a ziskennas er ster ;  
Pad ma vadee he Zalver,  
Yann a glevas ar c'homzo-man :  
« Zetu ma Mab, zentet out-han ».

VIII

Diwar ben Yann, Jesus d'e dro.  
Lare : « N'eus ganet, n'ag na vo,  
Eur mab dirak Doue ken bras  
Evel Yann, mab Zacharias.

IX

Skouer a nerz hag a zantelez,  
Yann a lare da Herodez :  
« Ho preur zo beo, na dlegec'h ket  
« Miret he vreg wit ho pried ».

Merc'h homan da ouël ar roue,  
Dirak-han ken brao a zanze,  
Ma laraz : « Gouy sort a giri,  
« Me reï d'id pez a e'houlenni ».

Ha gand he mam kelened man :  
« Penn Yann, emei, a fell d'in kad »  
Yann, er prison, oa dibennet,  
E ben d'ar plac'h fall oa roët.

O zant Yann, tad hon zado koz,  
Warnomp-ni skuillet ho pennoz,  
Teurveet, hirie, hon diwal  
A bep drouk 'vel hon zud gwechall.

Rag hon c'halon, vel ho hini,  
Zo stag ouz ilis ar Baly ;  
Na zo neblec'h ilis ken koant,  
Vel iliz koz ma badeiant

Reit ho pennoz d'ar vam, d'an tad,  
Gret ma rofoïnt, dre oll, skouer vad,  
Roët d'he iec'het ha furnez,  
Wil ren ervad ho ziegez.

Wit, en-ho foan, xo stad enhe,  
Gret vod zentus ho bugale !  
Ma chomo fur ar iaouankis,  
Stag ouz Doue, ous an ilis !

Miret bugale Lannuon  
C'hone bara war ar mor don,  
Eus an avel hag ar reier ;  
Gret ma tistrofoïnt iac'h d'ar ger.

Dalc'het dreist oll beo en hon c'hreis  
Ar fe a ra enor hon Breïz,  
Gret ma lugerno, vel gwec hal,  
Kroas hon badeiant, war hon zal.

